


CHANSONNIOU



85 / 55 m

Son Job al Louunker

1.

Disul poa deuet Job d'ar gear
E voa mezo vel er gelien,
E vreg Janed enna grogas,
E astennas var an daol vraz,
Ho diga, diga, diga,
Nag evid er sebeila,
E la roulon la e la roulon la.

2.

Eur chapel gaér e oa savet
En enor d'an den tremenet,
Dour benniget en he gichen
Gant an diou pe deir c'houlaouen,
Ho diga, diga, diga,
Va Jobig paour zo tremenet,
E la roulon la e la roulon la.

3.

Setu Janed dre ar barrez
Da voela gant tristidigez,
Va Jobig paour zo tremenet,
Breman me zo dibarrasset,
Ho diga, diga, diga,
Tremenet Job en eur lounka,
E la roulon la e la roulon la.

4.

Evel ma oa ar c'hiz er vro
Da veilla gant an dud varo,
Kerkent m'oa hanter-noz sonet,
Job an druilen skuiz o kousket,

Ho diga, diga, diga,
A ioa eta dihunet,
E la roulon la e la roulon la.

5.

Pebez spountaden voa eno
O velet sevel an den maro,
Pep hini grog en e gador
Hag a ia buhan da glask an nor.
Ho diga, diga, diga,
Job ar lonker ressusitet,
E la roulon la e la roulon la.

6.

Va Jobig paour, eme Janed,
Kredi rea d'in oas tremenet,
Lakeat e moa toulla daou vez
En aviz meravel hon daou assamblez,
Ho diga, diga, diga,
Chaned, c'houi zo zod mad da staga,
E la roulon la e la roulon la.

7.

Ne lakin mui dindan ma fri :
Na gwin, na chist, nag odivi,
Ho diga, diga, diga,
Dizonet mad ez oun brema,
E la roulon la e la roulon la.

PAOTR KEMPER.

BREZOUNEK

CHANSON AN DIMEZIOU

(Soun Yann al leue)

Ton anavezet : *Koublat an hini goz.*

1.

Selaouit kana eur zon vrao
A zo erruet ebars ho pro
Gant daou zen yaouank eureujet,
Selaouit mar kirit klevet.

5.

Ker kalet e kave he c'hroc'hen
Evel ar mean pe ar planken,
Ha va Yann baour mond e koler
Tol ar ribot ouz ar zolier.

2.

Ar goaz nevez felle d'ean mond ahred
En e vele da gousket
Mes ar vaouez ne c'hoanteas ket
Mond en e guèle kén abred.

6.

Ma voa nec'het an dud keiz
O klask delc'her o gatal reiz,
Yann al leue kaos dezo
Ne blije tamm da dud ar vro.

3.

Ma voa guisket ar ribot
Lakeat e guele an den sot,
Chouchet gand an dilhad gwele,
Setu trouplet Yann al leue.

7

Goude ya da glask e vestrez,
En ostaleri e voa mesvez ;
Mez dont d'ar gear vo ar goasa
Pa ne c'helle mui choum en he za.

4.

Yann al leue, pa zihunas,
Ouz e vaouez koant e troas
Hag hen komans d'he briata,
Ne blije tam mörse d'eza.

8

Dont a ra d'ar gear en eur voela
O velet petra zo great d'eza.
Diouallit paotred pa reoch « la cour »,
Kals eus ar merc'hed zo treitour.

Lezenn voti ar merc'hed

(2)

War ton : *Les fraises et les framboises.*

Selaouit, penn da benn,
Sonjit mad en enni :
Hano 'zo a lezenn
D'ar merc'hed da voti.
Hag evel ar voazed,
E c'helltint ie neuze
Beza eur senateur
Petrant député.

KENTA DISKAN

Hola ! Hola ! Merc'hed,
Na dit ket 'ta da gredi
N'eo ket c'hoaz sortiet
Ho-lezenn d'eoc'h da voti.

Ha ma c'hellt kredi,
Holl e vezint kontant
Da veza eur roue
Pe zoken presidan.
Rak en holl afferiou
Karont lakatt fri
Ha fouge a vez enno
Pa c'hellont komandi.

D'an diskan kenta.

Kement-se, ya merc'hed,
Ma fell d'eoc'h komandi,
Pa deuio ar brezel,
Z'eoc'h ive en hor plas ni
Da gostez ar vro.
Me lavar d'ar frontier,
D'arreti an enebour
Pe d'e gas d'ar ger.

D'an diskan kenta.

En deiz all dija,
Eur vaquez pinvidik
A sonje e voa er gampr
O c'hober politik.
Hag hi a lavare

Lèdan bras he ginou :
Ar c'henta ma c'hellfe
E chenchfe lezennou.

D'an diskan kenta.

N'eo ket ar brezel
A ioa en he fenn,
Mez evit ar voazed
E rafe eul lezenn :
Pan d'eo c'hoant dimezi,
An holl paotred yaouank
Ranko skriva d'ezi
Vit kaout e c'honsantamant.

D'an diskan kenta.

Hag eur wech dimezet,
N'ezuz ket leac'h da c'hoarzin,
E suprimo d'ar voazed
Ar c'hafet hag ar gwin.
Eur wech bemdez hebken,
Peb a gorniad butun
Ha kousket gant ar vreg
Nemet eur vech ar zizun.

D'an diskan kenta.

Hag ar goaz en dezo
Dezoblijef e c'hreg,
Heb truez hag heb damant,
A vezoz kondaonet.
Kroget vezoz ennan,
Taolet en eur prizon
Heb goulen digantan
Petric eo ar reizon.

EIL DISKAN

Ha ma vez an oll voazed
Evel d'omp o zantimant,
Ne zortio biken merc'hed,
Me lavar d'eoc'h franchamant.

A. B.

Goulennit an diskou savet ha renket gant A.

Son ar bicyclett

1

An deiz all eur paotrik yaouank
Na mond da bournen en doa c'hoant, } 2 vech.
Tra la la la
Na mond da bournen en doa c'hoant.

2

Ma kemeras e vicyclett,
Eteit a rimier e vao eat, } 2 vech.
Tra la la la
Eteit a rimier e vao eat.

3

Diouz an noz pa deuas en dro,
E dad a voa nec'het maro, } 2 vech.
Tra la la la
E dad a voa nec'het maro.

4

Penaoz va mab paour emezan,
Diou vicyclett e peuz breman, } 2 vech.
Tra la la la
Diou vicyclett e peuz breman.

5

Kredi a ran peuz hel laeret,
Esplika d'in a vez red, } 2 vech.
Tra la la la
Esplika d'in a vez red.

6

Lezit va zad ma kordin deoc'h,
Ha neuze zur e komprenoc'h, } 2 vech.
Tra la la la
Ha neuze zur e komprenoc'h.

7

Mintin ma p'oan eat da bournen,
Meus kavet va douz var va hent, } 2 vech.
Tra la la la
Meus kavet va douz var va hent.

8

An amzer a voa tomm meurbet,
An disheol hon deuz bet klasket, } 2 vech.
Tra la la la
An disheol hon deuz bet klasket.

9

Var ar geot glas p'oamp azezet,
Kalz eus e dilliad deus tennet, } 2 vech.
Tra la la la
Kalz eus e dilliad deus tennet.

10

P'oaa dija hanter zivisket,
Va dous d'in en deus lavaret, } 2 vech.
Tra la la la
Va dous d'in en deus lavaret.

11

Selaou ganen Saïk emezi,
Me rei d'it ar pez a gari, } 2 vech.
Tra la la la
Me rei d'it ar pez a gari..

12

Choaz ar pez a blijo ganet,
Netra d'it ne refuzin ket, } 2 vech.
Tra la la la
Netra d'it ne refuzin ket.

13

Kredi reoc'h n'oan ket bet nec'het,
E meus choazet ar bicyclett, } 2 vech.
Tra la la la
E meus choazet ar bicyclett.

14

Sod eo al louarn ma vel ar yar,
Na ma ne da ket d'he diskar, } 2 vech.
Tra la la la
Na ma ne da ket d'he diskar. Fine ANDRÉ.

SONIOU

(3)

SON AR MARTOLOD YAOUANK



War eun ton brudet.

1.

Ma mij eun tamm paper gwen
Eur bane liou hag eur bluenn,
Me moa skrivet eul lizer
Hag a ve dereat
Var sujet eur femelen
Hag en deus kalonad.

2.

He mamm, ouz e c'honsideri,
Eun deiz a c'houennas outi :
Dourlivet bras ho kavan,
Va merc'hig Madelone,
Ker melen eo ho pijaz
Evel ar bot chifone.

3.

Va mamm, evit donet d'am yac'hat
Me ranke kaout eur paotr delikat
A zo eat d'an Itali
Eun nebeut amzer zo ;
Ma ng deu ket d'ar gear,
Kaoz vo euz va maro.

4.

Va merc'h, ganec'houi, me zo souezet
E ve c'houi troumplet ken abret,
Ne peus nemet pemzek vloaz

O rein en o c'hozek
Me jonje d'in-mè, e vagen
Eur verc'h fur ha parfet.

5.

Va mamm, ma ne peuz eur memor vad,
D'ar memez deiz, d'ar memez oad,
Ne poa nemed pemzek vloaz
O rein en o c'hozek
Na pa ne poa kontrangnet
Va zad d'ho kemeret.

6.

Va merc'h, leskomp hon diskourchou
Ha deomp da skriva lizerou
Da gas d'ar martolod yaouank
Da bressa e gonje.
Joa bras a vez gantan
Pa glevo kement-se.

7.

Tri c'hant skoed en arc'hant gwen
Ha kement all en aour melen
Zo kaset d'ar martolod
Ne goll ket tout e boan,
Bed en deuz eur femelen
Hag eur martolod bihan.

EUR CHASTELLAD.

H. LF.

J BREIZ

SON AR BOESOUN

1

Klevomp tout kana eur zon vrao
Var gement hini a vez mezo ;
Evit ma klevo pep hini
Ar virionez hep damanti.

2

Goulskoude me a oar er vad
E mo outo eur goall grogad
Pa zint tud fur var o meno
An oll dle kemer skouer diouto.

3 .

Koz, yaouank, paour ha pinvidig
Terrubl in dre nerz o bannig
Hag an dud krefa gwizieka
En o c'henver ne dint netra.

4

An ozac'h mezo a lavar
Er barrez ma neus ket va far ;
E gezek, e zaout emezan
Eo ar re wella 'zo er vro-man.

5

En ostaleri e vo digemeret mad
Keit ha ma pado e yalc'had
Mes pa ne vo mui guenneg ébet
Dustu er meaz e vo taolet.

6

Pa vez oc'h eva odivi
Neus kear ebet par d'e hini ;
Labouret mat e zouarou
Geot keit hag hen en e brajou.

7

Hirio eo leun beteg krevi,
Varc'hoaz n'en do tamm da zribi,
Gant ma kavo ataø da eva
Ne ra ket foute kaer emeza.

8

Eur c'hreg zo troet da eva,
En he zi e vanko pep tra ;
E leac'h prena pep hag holenn
Va c'hagn a lipo he gwerenn.

9

Ne zeus netra ken divalo
'Vid gwelet eur vaouez mezo ;
Roched an ozac'h zo gwerzet,
C'hoaz e lavaro vo kollet.

10

Surtout pa gay mad odivi
Vez ket pell o kempen he zi ;
Kar guerza rafe al loudourenn
He bragez koulz hag he losten.

11

Gwelet e vez ar yaouankizou
Alies e bars tout ar foariou
O vonet ebars an ostaleri
Ha pa zortiont e vez ruz o fri.

12

Ha pa vez poent da zont d'ar gear
Vez kollet ar paourkeaz paner ;
Setu peanos barz ar fermiou
E vez kollet paner ar viou.

Intanv al Lochenn

4

1.

Er bed-man nag aour nag arc'hant
 Biskoaz n'o deus chalmet va chalon,
 Me'zo eur paourkeaz paisant
 Kontant edon em fozision
 Met va fried karantezus
 A gollan hirio, pebez anken !
 Gwelit ha n'oun ket maleurus
 Chouec'h krouadur am eus em lochen. (bis)

2.

En amzer m'oa beo va fried
 He furnez a chalme va c'halon
 Va bugale ouz va c'haret
 A roe d'in konsalasion
 Beb eil holl e poken d'eze
 Eun tad eurüsoch ne vo biken
 Dre o jestou tener bemde
 Edon eurüs ebarz em lochen. (bis)

3.

D'ar mintin pa 'zan d'ar parkou
 Adarre da gommans va dervez,
 E lezan va bugaligou
 Eus va zi da gemeret evez.
 Hag en noz pa deuan en dro
 Evit va distrei eus, va anken
 En em stardont holl war va zro
 D'am c'honsoli ebarz em lochen. (bis)

4.

as eo va laouenedigez
 ezan er gêr-gant va ziad.
 a welan va merc'hig kez
 ur a deu war va daoulagad ;

Seblantout a ra d'in gwelout

He mamm ener ebarz em c'hichen,
 En despet d'am c'heuz diremet
 Oun c'hoaz eurus ebarz em lochenn. (bis)

5.

O, ma c'hellfen hep kaout mizer
 Sevel ha deski va bugale
 E c'hellfen c'hoaz gant an amzer
 Fortunia va merc'hig, marteze.
 Kapabl da labourat an dachenn
 Neuze va faotred a vo bras
 Em c'hozni me a c'hello c'hoaz
 Beva eurus ebarz em lochenn. (bis)

6.

Eurusoc'h c'hoaz me 'n'em gavo
 P'o gwelin o c'hounit o bara.
 Neuze pa zeuio ar maro
 Eus ar bed-man d'am delivra
 Va mignonned am interro
 Gant va fried pe en he c'hichen.
 Ha va bugale a ranno
 Va zamm tiegez ha va lochenn. (bis)

7.

Em gwele douar pa vezin
 O repoz e hered Rumengol
 Plijet kemer truez ouzin
 O Itron Varia Remed-Holl !
 Ha pa deuio va bugaligou
 War va bez da ober o fedenn
 Va Doue c'houi a bardouho
 Da ene paour Intanv al Lochen. (bis)

"La Voix de son Maître", merket war diskou gramophon

LE VEUF DE LA CHAUMIÈRE

1.

De tous les riches d'à présent
Je n'envie pas la richesse.
Je ne suis qu'un pauvre paysan
Qui vient de perdre sa maîtresse.
La mort me ravit aujourd'hui
La plus aimable ménagère,
Voyez comme je suis réduit !
J'ai six enfants dans ma chaumière. (*bis*)

2.

Lorsque mon épouse vivait
Je l'adorais pour sa sagesse,
Elle et puis mes enfants m'aimaient,
Souvent me comblaient de caresses ;
Je les embrassais tour à tour.
Ah ! que c'était doux pour un père !
Par leurs caresses chaque jour
J'étais heureux dans ma chaumière. (*bis*)

3.

Le matin quand je vais aux champs
Continuer mon labourage,
J'laisse mes pauvres enfants
Gouverner mon petit ménage
L'soir quand je rentre chez moi,
Pour me faire oublier leur mère,
Ils viennent tous autour de moi
Me consoler dans ma chaumière. (*bis*)

4.

Ah ! si je pouvais réussir
A bien élever ma famille,
Peut-être qu'un jour à venir
Je pourrais marier ma fille.
Alors mes garçons seront grands,
Ils pourront labourer la terre.
J'aurais espoir dans mes vieux ans,
De vivre heureux dans ma chaumière. (*bis*)

5.

Et je serai bien plus heureux
Si j' les voyais gagner leur vie
Et si la mort fermait mes yeux,
En tranchant le fil de ma vie.
Tous mes amis m'enterrent
Quand j'aurai fini ma carrière.
Et mes enfants partageront
Mon petit bien et ma chaumière. (*bis*)

6.

Lorsque du sommeil de la Foi,
J'irai dormir au cimetière,
Daignez avoir pitié de moi
Vierge de Rumengol, ma mère !
Quand mes enfants, dans ce saint lieu,
Viendront prier sur ma poussière,
Vous pardonnerez, ô mon Dieu !
Au pauvre veuf de la chaumière. (*bis*)